

# B U E

## ANN OTRO SANT KONERI

### D I S K A N .

*Sant Konéri, Sant evuruz,  
Ouz moez Doue bepred sentuz,  
Pedet ma virfomp he lezen  
Ha ma refomp gwir binijen.*

Roue ar Sent, Salver ar bed,  
Roet d'in-me gras ha spered  
Da disklerian da bep-hini  
Bue 'nn Otro sant Koneri.

Laret a ra da beb-unan  
Mado ann douar n'en int man,  
Avel ha moged, netra ken,  
Pa ne badont ket da viken.

Avel ha moged, treo ar bed,  
Gras Doue a-vad ne d-eo ket :  
Gant gras Doue er c'halono,  
E tizalc'houeer ann Envo.

Lezen Doue eo red miret,  
Pe ve ezet, pe na ve ket,  
Hag enn han Doue pardoni  
D'ar re a deu d'hon enebi.

En Breiz-Veur ar Zant binniget  
A oe ganed ha beleget :  
Humbl a spered ha disked braz,  
Furoc'h hag en na valeaz.

Furaet bemde a venne  
Ha kas d'ar penn lezen Doue :  
He vado d'ar paour a roaz,  
Skanvoc'h enn hent mad e redaz.

Gant Tual enn he vanati,  
E oa manac'h Sant Koneri,  
Enn amzer ma teuaz eunn el  
Da weled ann Abat santel.

Sav prim, Tual, a laras-han,  
Eman ar mor braz da dreuzan :  
Da Vreiz-Izel eo red monet,  
Pa zo gant Doue lavaret.

Kerkent Sant Tual a zentaz  
Ha gant Koneri e deuaz,  
Gant Koneri ha kals ouz-penn,  
Ouz-penn tri-ugent 'nn eur vandenn.

Kad a rejont a-berz Doue  
Eul lestrig hag a c'hortoe ;  
War douar Arvor ho zougaz  
Ha kerkent e tisparisaz.

Piou oufé rei da intenti  
Pe zantelez oa he hini ?..  
Ann Otro Doue a gare,  
Ha karet a re he hente.

Gant he beden e oa dalc'h-mad,  
Dalc'h-mad be teg o labourat.  
Dous ha pur a galon bepred,  
Rag gant Doue 'oa he spered.

He gorf santel a gastie  
War ann douar noaz e gouské,  
N'a nemet bara ha dour ien,  
Kemend ha bevan, netra ken.

He skoer vad hag he bedenno  
A oa he gaeran sarmonio :  
Hep-dale 'oa burzud gwelet  
Ar vro da Zoue goneet.

Eunn dijentil a oa er vro,  
Eunn den, Alvanuz he hano;  
O tont eunn de euz ar chase  
E zaludaz ann den Doue.

Ar Sant a lere he beden,  
Neuze na dole ple diouz den :  
Eunn dra vad hag a lakeaz  
Ann otro enn eur goler vraz.

— Piou, emean, ann azen-ze  
Ker fier ha pa ve roue?  
N'em zalud ket p'en zaludan !..  
Me a deui a-benn anéan.

He zenechal a oa gant-han  
Ha kerkent a laraz d'ean :  
— An den-ze 'zo beleg santel  
Aman deuet a ziabel.

Aboe ma 'z eo arri er vro,  
En deuz gret meur a vuzudo ;  
Evid ann oll e bed Doue,  
Na baouez tamm na noz, na de.

Ar c'homjo mad man ne oant ket  
Evit dousaet he spered :  
Lavaret a rez da daou den  
Kere'hat ar Sant enn he lojen.

An daou-man 'oa gwé 'vel loened ;  
Distrei a rejont en eur red,  
Ha da saillat war ar Sant kez,  
Evel bleidi war eunn eiez.

Skei a rejont ann den Doue,  
Skei a rejont ken didrue,  
Ma torjont daou euz he gosto :  
Ar Sant a oa hanter varo.

Ar senechal a arriaz,  
Re diweat a oa, ziuoz !  
— Paouzet, emean, ho tolio !  
Paouzet raktal pe me 'welo.

An den-man evel eunn den mad,  
Ann daelo war he daoulagad,  
A dosta d'ar Sant gant true,  
Rag gwal boaniuz 'oa hé doare.

Ar Sant war he daoulin zavet,  
A lere c'hoaz gant joasted :  
— Ma foanio, Jezuz, ma Doue,  
Ma foanio n'en int man d'ho re !

Er C'halvar ouz ho kroaz staget,  
D'ar pec'her hoc'h euz pardonet.  
Pardon ive d'em bourevien !  
Pardon, pardon ha sklerijen !

Kerkent, pebez tra burzuduz !  
Stad ann daou den a oa spontuz :  
Ho fenn war ho c'houk kildroet  
Hag hi ho daou mezevennet.

Evel barr dalio a krenent ;  
Ne welent tamm, ne tic'houezent ;  
Ne oant ket 'vit finval kammet...  
Goalen Doue ne c'hoari ket !

Ar senechal braz he estlamm  
A iez war vare'h d'ar pevar lamm  
Da digemen da Alvanuz  
Eunn dra a oa ker burzuduz.

Ann Otro 'dalek ma klevaz  
Da lojen ar Sant a redaz,  
Hag en d'ann daoulin da bedi  
Ma teurveje ho fardoni.

Sant Koneri ouz ho gwelet,  
War ho daoulin ker glac'haret,  
A gavaz tu da brezek d'he  
Ar gwir Fe ha doujanz Doue.

Goude bean ho c'helennet,  
A digasaz d'he ar iec'hed,  
Iec'hed ar c'horf d'he a roaz  
Ha hini 'nn ine gwelloc'h c'hoaz.

Ann Otro bedaz Koneri  
Da dont gant-han da chomm'nn he di.  
— Deut gan-in, emean, Otro,  
Ha d'ac'h e rin ma oll vado.

Ar Sant a lavaraz d'ean :  
— Et d'ho ti, me a chomm aman.  
Losket em euz ma oll vado.  
'Vit bevan paour er-mez ma bro.

En berr amzer e oe brudet  
Ar burzud neve c'hoarveet :  
Tro-dro ne oa gant pep-hini  
Nemet kelo a Goneri.

A bep tu 'teuer d'hen kavet :  
Ann dud klanv a glask ar iec'het,  
Ar ré-all nerz ha sklerijen  
Da vevan 'vel gwir gristenien.

Eur wéch ar Sant a oe pedet  
Da laret eunn ofern euret  
Rag ar priejo 'n evoa fe  
Da bedenno ann den Doue.

Dont a rez eta Koneri.  
Ar min a oa d'ofereni,  
Ar min oter n'en evoa ken  
Nemet eur pillier d'hen zouten.

Pa oat en-kreiz ann oferen,  
Parfed ann oll gant ho feden,  
Ann droug-spered braz he goler  
A dor ar mia dre ann hanter.

Evit-han da vean torret  
Ar min oter na finvaz ket :  
Sant Koneri a oa eno  
Trec'h he bedenn d'ann diaoulo.

Ar Sant a vada c'hoantae  
Bean he-unan gant Doue ;  
C'hoant en doa da guz ouz pep den  
He vue hag he binijen.

Rak ze gant Doue kuzuillet  
E tilezaz koajo Gwened,  
Da Blouvouskan en bro Treger  
A deuz da zével he c'her.

Eno koulz hag en bro Gwened,  
Kalz a dud kez en deuz tennet,  
En deuz tennet da gad Doue,  
O tiski d'eze ar gwir Fe.

Enn enor d'ann Dreindet zantel,  
E savaz eno eur chapel ;  
Ha goude kalz a vurzudo,  
E iez ac'hane d'ann Envo.

Enn he chapel eman bepred  
He benn, he divrec'h binniget,  
Ha gant-he kalz a relego :  
Eunn tenzor kaer meurbed d'ar vro.

Ar bobl kristen diwech er bla  
A dired di da bardona,  
Sur peb-unan euz he vennad,  
Pa bed Koneri gant fé vad.

Pedet e ve ouz pep klenved,  
Kerkoulz a gorf 'vel a spered,  
Ouz ann derrien hag ar pec'hed,  
Gwasan klenved a zo er bed.

Da gad Koneri ar moraer,  
Gwal nec'het dindan gwal amzer,  
A gas kalonek he beden,  
Ha Sant Koneri hen zouten.

Kemeromp skoer war er Sant-man,  
Ha karomb ar bed evel-t-han,  
Karomp Doue 'vel m'en deuz gret :  
Enon 'man ann evurusted.

Sant binniget, Sant Koneri,  
Reit he vennad da bep-hini :  
Gras Doue e c'houlomp kentan,  
Ha treo ann donar da diwan.



Hag a ve pinijen gant-hi,  
Da vo lezen Doue hon hini ;  
Ha goude reuz ar vue-man  
Ni 'iel d'ann Ee da diskuizan.

Plouvouskan, d'ar beveded zul a viz Gouelen, de pardon Sant Koneri, 1878.

DISKAN.

*Sant Koneri, Sant evuruz,  
Ouz moez Doue bepred sentuz,  
Pedet ma virfomp he lezen  
Ha ma refomp gwir binijen.*



Koneri (1878)